


L. I. C. & M. I.

GLOAR DA JESUS

KANTIK EVIT NEDELEK



Kanomp hirio, Kristenien, da Jesus hor Zalver,
 Nevez ganet evid-homp en eur c'hraouïg dister,
 Kanomp holl a greiz kalon, kanomp holl asamblez :
 Henor, gloar ha meuleudi, doujans ha karantez !

Jesus, Mab an Eternel, gwir den ha gwir Douë,
 Ni ' grêd ez oc'h hon Aotrou, hor Mestr hag hor Rouë ;
 Pe var vreaç'h ho Mam zantel, pe var ar plouz kalet,
 Ni ' wêl, stouët d'hon daoulin, hor Zalver benniget !

Bennoz bepred d'Heoc'h, Jesus, a zo deuet e'r bed-ma
 Evit tenna divarn-homp pec'hed hon tud kenta,
 Hag hon bleina holl goude var hent ar baradoz...
 Oh ! na pebez karantez : bennoz, Jesus, bennoz !

Siouaz, beteg-hen, Jesus, hor c'halon baour ato
 Ien-sklaz ' zo bet 'n ho kenver ha kirieg d'Ho maro ;
 Mez, gant skoazel gras Douë, e'n amzer da zoned,
 Ni ' vo fidel d'Ho lezen, gant heuz ouz ar pec'hed.

Ousper, p'ê gwir e chomit gan-homp var an Aoter,
 Ni ' zeui' beb miz d'Ho reseo gant eur galon dener ;
 Gan-Heoc'h, Jesus, 'n hor c'halon, ni ' vo pur ha santel,
 Ha gant aked ni ' heulio lezen an Aviel !

Henor, gloar ha meuleudi d'hon Douë benniget,
 Tad, Mab ha Spered Santel, tri Person an Drinded !
 Ia, gloar e barr an Nenvou d'hor Mestr holl-c'halloudus,
 Ha gwir beoc'h var an douar da ziskiblien Jesus !

AMEN.

POST † CARD

Ce petit cantique, composé par le R. P. TRÉBAOL, O. M. I.,
a été approuvé par l'Autorité diocésaine de Quimper.

Il peut se chanter sur l'air de: *Elez euz ar Baradoz, sellit pebez
henor* (Kantikou Eskopti Kemper, Tön No. 36).

S'adresser (30 c. la douz.) à l'Interpr. G.M. TRÉBAOL, O. M. I.,
Area Commandant's Office, Renescure, Nord, France.

